

GWERZ

War maro eul leanez koz argaset dez he leandi.

WAR DON : *Silvestrik.*

Pan arruaz ar seurez war doull dor he c'houent,
Boutet gant pevar archer hep m'halle trei he fenn,
Pa glevaz war he zeulio an nor-dâl o serri,
He c'halon baour a rannaz gant keun ha melkoni.

Evel eur bugel bihan tennet digant e vam
A gri forz gwalc'h e galon, a dalc'h d'ei hep flach tam,
A seurez koz (bez' he doa dek vloa ha tri-ugent),
Gant he divrec'h 'vriate men-treujou he c'houent.

Ha ma lavare neuze en eur skuilha daerou,
En eur bokat gant glac'har d'an nor ha d'an treujou :
— « Allaz, allaz, ma c'houent, ma gwarez, ma holl vad,
Me garje koll ma bue kentoc'h 'vit ho kwitâd !

» Me garje mervel aman elec'h oann diskennet,
Breman 'zo hanter-kant vloa da vean kouentchet,
War an treujou-man me 'm oa profet d'ac'h ma bue,
He c'hemeret-hi aman, o Jezuz ma Doue !

» Mar doun bet hanter-kant vloa servijerez fidel
D'Ac'h, ha d'ho Mam vinniget, en eur dougen ma gouel,
'Vit ma vo ganin douget betek eur ma maro
Kemeret 'ta ma bue aman, war an treujo.

» N'am lezet ket da vean eun danvad dianket,
Distolet 'kreiz jolori ha gwall-festou ar bed,
Sonjet oun koz 'n ho servij, skwiz ha faez gant an oad :
Ma c'haset d'ho paradoz ganac'h, o Pastor mad.

» Na oa lec'h war an douar 'met ma leandi kloz,
E lec'h 'kare ma ine dale c'hoaz d'ho kortoz ;
Mez hirie, pan eo zerret ouzin e zorejou,
M'hoc'h asped da zigeri d'in-me dor an nenvou.

» Petra rin hiziviken war c'horre an douar,
Evel eun den dizakret, hep repu, kar na par ?
Ma Doue 'ta, ma holl joa, na pebez trugare
Am ije, ma teurvefec'h digeri d'in ma be ! » —

Doue an euz chilaouet he c'hlemm hag he feden :
Epad m'oa war he daoulin, he mouez 'davaz souden ;
War dreujou he c'houent ker he deuz harpet he zal,
Ha war an eur, hec'h ine 'zo nijet d'ar bed-all.

En bered he leandi ec'h eo bet douaret,
En harz eur ween ivin, 'kichen he c'hoarezed ;
Ac'hane, eun de da zont, gante hi a zavo :
An de-ze, Bediz digar, d'ho tro c'houi a ouelo !

DIR-NA-DOR.
